

D'ar 14 a viz Mezheven

- E 287, e-kichen Augusta Suessionum, hiziv Soissons e Bro-C'hall, merzherenti **sant Valer ha Rufin**, merzherion.

Bez' e oant o-daou pennverourion domani an impalaer war ribl ar stêr Vesle hag e tiskouezent o feiz dre o buhez a binijenn hag o donezonoù d'ar beorion. Lakaet e voent d'ar marv war urzh Rictius Varus, Prefed Pretordi Galia, pa c'houc'hennas Maximianus Herculus, o tistreiñ eus e drec'h war ar Vagadiz e-kichen Pariz, e vefe diwriziennet an anv kristen eus ar vro.

- E 847, e Kêrgustentin, **sant Methodius**, eskob.

Ganet e Sikilia ez eas war e studi da gKêrgustentin e-lec'h ma'z eas da vanac'h. Pa oa abad ez eas da gaout ar pab Paskal I^{añ} evit difenn kehelerezh an ikonennoù. Deuet da vezañ Uheldad e tiazezas "Gouel ar Reizhkredenn" a vez lidet abaoe gant Ilizoù ar Reter.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Devneg**, eskob Gwened, lerc'hiader sant Padarn, a eure sevel iliz sant Padarn ma voe degaset relegoù an eskob.

- E Kembre, er V^{vet} kantved, **sant Dogvael**, abad hag eskob war enezenn Vreizh, e Penvro (Bro-Gembre), patrom parrez Landoveneg e Bro-Sant-Maloù (Saint-Domineuc).

D'ar 15 a viz Mezheven

- War-dro 303, e Roma, da vare Diocletianus, merzherenti **sant Gwion** (Lt. Vitus, Gl. Vite pe Guy, It. Guido), genidik eus Lukania e kreisteiz Italia pe c'hoazh eus Sardinia. Pedet e veze evit bezañ gwarezet diouzh ar c'horea, ur c'hleñved anvet *dañs sant Gi*. Kontet e vez e-touez ar 14 sant skoazeller.

E gehelerezh en em ledas dre-berzh e *Vita* skouerius ha pa voe treuzkaset darn eus e relegoù da Sant-Denez e Bro-C'hall gant ar Veneaded en IX^{vet} kantved, lod all da vanati Corwey e Wesfalia, lod all c'hoazh da bPraga war c'houlenn sant Venceslas dug Bohemia.

- E 1081, er Valais e Bro-Suis, **sant Bernez a vMenton**, beleg, arriagon Aost, diazezour Chalonied Ospiti Sant-Bernez-Meur hag hini Sant-Bernez-Bihan.

- E 1601, e Pibrac e-kichen Tolosa, **santez Jermena Cousin** (Gl. Germaine), gwerc'hez. Hag hi bugulez, e renas ur vuhez uvel gant meur a amrouadenn hag e varvas d'he daou vloaz warn-ugent. He c'horf a voe adakavet dibistik ha meur a vurzhud a c'hoarvezas dre he hanterouriezh.

- E Breizh, e 585, distro da Zoue **sant Gougae** pe **Vouga** pe **Vio** pe c'hoazh **Bec'hu**, arc'heskob Ard Macha en Iwerzhon, deuet da Vreizh da benitiour da gentañ er Vro-Vigouden, e Tregenneg, lec'h ma vez anvet sant Vio, diwezhatoc'h e Bro-Leon, lec'h m'en deus lezet e anv da barrez Sant-Nouga e-kichen Lesneven.

Bez e vefe an hevelep hini a sant Bec'ho paeron iliz Prizieg e Bro-Ereg.

- E Breizh c'hoazh, er V^{vet} kantved, **santez Nonn pe Melaria**, mamm sant Devi. Genidik eus Kembre, e vefe merc'h Cynyr eus Caer Gawch pe hervez lod all merc'h Brec'han. Leanez e oa pa reas he soñj dont da Vreizh-Vihan. Gwallet e-doug ar veaj gant Ceredig, pe Sant (Xantus) tiern Ceredigion, e c'hanas ur mab a anvas Devi hag a zeuas da vezañ ar sant anavezet mat, arc'heskob Menevia e Bro-Gembre. Hi a renas ar vuhez a benitiourez e Dirinonn e ledenez Plougastell-Daoulas e Breizh.

- E Breizh bepred, **sant Ev**, beleg, penitiour e Bodeoù e Kernev-Uhel.

- E Kembre, er V^{vet} kantved, **sant Trillo**, keneil sant Kadvan.

- **Sant Nin**, merzher.

D'ar 16 a viz Mezheven

- E 211, e Vesontio, hiziv Besançon war ribl tolzenn ar Jura, merzherenti **ar sent Ferreol**, beleg, ha **Ferjeux**, diagon.

- Er IV^{re} kantved, e Tarsiz en Azia-Vihanañ, da vare Diocletianus, merzherenti **sant Kir** (Gr. Kêrikos, Gl. Cyr) **ha santez Yulizh** (Gl. Julitte) e vamm, merzherion.

Tra ma klaske ar soudarded jahinañ ar bugel e troas a enep d'ar vourevion kement a glaskent ober : unan a voe dêvet, unan all bervet hag an trede skourjezet. Neuze aet e kounar ruz e tapas barner ar palez e treid ar bugel hag e flastras e benn ouzh diri al lezvarn.

- E 551, **sant Aorelian**, eskob Arelate (Arles) er bProvensa, marvet e Lugdunon.

Anvet gant ar pab Virjil e legad e Galia e tiazezas e Arles, diwar frontalite Childeberzh I^{añ} mab Klodwig I^{añ}, ur manati evit ar wazed han unan all evit ar maouezed o pourchas ur reolenn da bep hini anezho.

- E 640, merzherenti **santez Alina**, gwerc'hez er Brabant.

Genidik eus ar pagus Bracbatensis, hiziv Brabant, e oa ur baganez anezhi pa gejas gant ur beleg he lakaas dre e gomz da vont da heul ar C'hrist. He zad fuloret a gasas daveti tud armet hag int arfleuet gant o feulster he lazhjont didruez.

- E Breizh, e 301, **sant Similian**, eskob Naoned, anvet "ar feizvonnour meur" gant Gregor Teurng. Diwall a reas ar gêr diouzh ar Varbared. Gounit a reas d'ar feiz sant Donasian. Kerkent ha deiz e varv e voe enoret evel ur sant.

- E Kembre, er VI^{vet} kantved **sant Kurig**, abad ha penitiour. Da gentañ milour e servij ar roue Maelgwn Gwynedd.

- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **sant Kedeg**, eskob, diskibl sant Padrig.

D'ar 17 a viz Mezheven

- E 1435 e Venezia, **ar gwenvidig Pêr Gambacorta a bPisa**, beleg diazezour Breudeur benitiourion Sant Jerom (*Frates heremitaie sancti Hieronymi*).

E 1380 e tiazezas e Montebello e-kichen Urbino, e rannvro ar Marche, manati kentañ an urzh a voe aotreet hag harpet gant ar bibion Varzhin V hag Eujen IV hag en em ledas dre Italia, Flandrez, Hungaria, Aostria ha pergen e kreisteiz Bro-Alamagn. E geneiled gentañ a voe hailhoned gonezet d'ar feiz gentañ.

- Er V^{vet} kantved, e Hartland en Devon e Bro-Saoz, merzherenti **sant Neizhan pe Nizon**, penitiour, mab henañ Brec'han.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Herve pe Houarnev**, abad, Paeron ar varzhed.

Ganet dall e Plouzevede e Bro-Leon, mab sant Houarvian ha santez Riwanon, e voe skoliet gant sant Marzhian e Plougernev ha diwezhatoc'h gant e eontr sant Urfol e Lanrivoare. Aet da vanac'h e

savas ur manati e Lanhouarnev. Ec'holieret e voe gant sant Houarzhon. Bleniet e veze bepred gant e ziskibl **sant Gwic'haran**. Mervel a reas war-dro 568 ha beziet e voe e-kichen e vamm.

- E Breizh c'hoazh, e 530, **sant Avid**, mignon sant Lubin, abad Micy-Saint-Mesmin e-kichen Orleañs ha da c'houde, hervez an hengoun lec'hel, penitiour e parrez ar Peniti e Bro-Roazhon.

- En Iwerzhon, e 697, **sant Moling**, manac'h e Fearn, eskob abad Gleann Dá Loch.

- En Iwerzhon c'hoazh, e 699, **sant Koulman**, abad a savas teir iliz.

D'an 18 a viz Mezheven

- War-dro 286, e Roma, merzherenti **ar sent Marcus ha Marcellianus**. Hag int gevelled eus Roma, gounezet d'ar feiz kristen adalek o yaouankiz, e voent harzet da vare heskinadeg Diocletianus, ha barnet da vezañ dibennet.

O zud o aspede da azeuliñ an adoued hogen sant Bastian, ofisour an impalaer, o broudas da chom feal d'ar feiz. Tachennet ouzh daou beul e voent treuztoullet gant goafioù.

- War-dro 304 e Tripoli e Bro-Liban, merzherenti **sant Leoñs**. Hag eñ soudard eus Fenikia e gwarnizon Tripoli e voe enkablet eus an torfed a abostolerezh ha barnet d'ar marv. Dibennet e voe goude boureviadurioù spontus evel bout krouget ar penn en traoñ gant ur maen ponner staget ouzh ar gouzoug. E gehelerezh en em ledas en Iliz Siria a oa e hini.

- E 1697, **sant Gregorio Barbarigo**, eskob Bergamo ha Padova.

Ganet e Venezia eus un tiegezh uhel ez eas da veleg goude e studioù war ar gwir. Ur wezh eskob e kemeras skouer war sant Charlez Borromeo evit reizhañ ar gloer hag avielañ ar boblañs oc'h en em reiñ d'an holl hep kontañ.

- En Iwerzhon, **sant Forodhrán**, abad ha **sant Baithin**, manac'h, e vreur.

- **Treuzlec'h relegoù sant Arzhvael.**

D'an 19 a viz Mezheven

- En II^{eil} kantved, e Milano, merzherenti **ar sent Gervez ha Protez**.

Sant Ambroaz a zizoloas o c'horfoù hag o stalias d'an deiz-mañ e 386 er brientiliz en doa savet en o enor.

- War-dro 679, **sant Deodad** (Lt Deodatus, Gl. Dié pe Dieudonné), eskob Neverdun (Nevers), diazezour abati Saint-Dié-des-Vosges ma veze heuliet reolenn Sant Koulman.

- E 1027, **sant Romuald**, abad, diazezour Urzh ar Gamalduled.

Goude ur yaouankiz dirollet, Romuald a yeas da vanac'h beneadat e Ravenna e c'hêr c'henidik. C'hoant gantañ unaniñ ar vuhez a gumuniezh hag hini ar benitiourien ez eas da vevañ nepell diouzh Venezia gant ur penitiour anvet Marino. Ambrougañ a rejont o-daou an Doj e Bro-C'hall hag e chomjont ur prantad e-kichen abati Sant-Mikael Koucha er Pireneoù. Brudet evit e santelezh, Romuald a voe galvet da vont da adreizhañ manatioù e Bro-C'hall, en Italia, e Polonia, en Hungaria betek sevel e Camaldoli e-kichen Arezzo e Toskana ur stumm nevez a vuhez penitiour o liammañ labour ha lidvezh doueel gant ar vuhez penitiour. Mervel a reas e 1027 e manati Val di Castro en doa savet nepell diouzh Ancona.

- E 1341, **santez Juluana Falconieri**, diazezourez ar Mantelled.

Genidik eus Firenze e tiskouezas ar brasañ deoliezh adalek he yaouankiz hag e voe degemeret evel gwerc'hez emouestlet gant sant Fulub Benizi. Evel-se e krogas gant skour benevel Servijerion Maria ma oa e eontr Aleksis Falconieri kendiazezour anezho.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **santez Riwanon**, mamm sant Herve, c'hoar ar sent Riware hag Urfol. Ganet e Lanriwal war barrez Plouzevede e Bro-Leon e voe beziet e Lanhouarne e-kichen he mab.

- E Kernev-Veur, er VI^{vet} kantved, **santez Burienn**, penitiourez iwerzhonat.

D'an 20 a viz Mezheven

- Er IV^{re} kantved, **sant Latuin**, eskob kentañ Sez (Sées), kaset gant ar pab Bonifas I^{añ}.

- E 537, war Enez-bPonga, merzherenti **sant Silver**, pab.

Diuzet pab e 536 e voe skarzhet eus e sez war intrudu an impalaerez Teodora dre ma nac'has lakaat en-dro en e garg Uheldad disivouder Kêrgustentin a oa bet kondaonet gant e ziaraoger. Kaset d'an harlu da gentañ en Azia-Vihanañ, e varvas war Enez-bPonga e kreisteiz Italia, brevet gant ar poanioù bet diwasket gentañ.

- E 1391, e Tesalonike, **sant Nikolaz Cabasilas**, doueonour reizhvriat. Kuzulier ha mignon an impalaer Yann IV Kantakuzen, en devoe ur roll a-bouez en adsav sevenadurel ha kevrinel Bizantion hag eñ eus skol an hezikasm da-heul da sant Gregor Palamas.

En e oberennoù pennañ "*Desteriadur al liderezh doueel*" hag "*Ar vuhez er C'hrist*", e tegas da soñj ez eo an doueadur hag an unaniezh ouzh ar C'hrist pal buhez speredel pep kristen o treuzneuziañ dre-se sevenadur denoniel e amzer hag o tont da vezañ doazhour an "hezikasm sakramantel."

- E 1626, e Nagasaki e Japan, merzherenti **ar gwenvidig Francisco Pacheco** (ganet e Ponte de Lima, Portugal), beleg, **hag e 8 geneiled**, leaned eus Keneilez Jezuz, a voe taolet en tan dre gasoni enep ar feiz.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Meogon**, abad, penitiour e-kichen Sant-Brieg lec'h m'en deus lezet e anv e parrez Lanvaelgon.

- E Kembre, e 586, **sant Govan**, penitiour war an aod e Dyfed, tost da Boscherston er Pennvro (Pembrokeshire).

- War-dro 670, **sant Govan** (Gl. Gobain), beleg penitiour iwerzhonat. Breur sant Gwaznou, abostolour Hannonia (an Hainaut), e vefe.

E Bro-Saoz e voe diskibl sant Fursa e Burgh-Castle er Norfolk hag e kristenaas roue Anglia ar Reter. Gant sant Fursa ez eas gentañ da Vro-C'hall war un dro gant ar sent Boethian, Albev hag Aelgeis, a vefe e vreudeur. Hervez lod e vije bet o chom en abati Sant-Visant Laon pe e Corbeny a-raok mont da benitiour war ar Mont-Désert a voe penn-kentañ kêr Saint-Gobain. Lazhet e voe gant ailhoned.

- **Merzherion wenvidik Iwerzhon** bet lakaet d'ar marv etre 1572 ha 1681, hag int eskibion, beleion, liked ha reuzidi ar *Penal Laws*, lezennoù disparzhus Bro-Saoz e-keñver ar gatoliked. Gwenvidikaet int bet gant Yann-Baol II e 1992.

- E Breizh, e 1136 : **Diazezidigezh abati kisterkiat Langoned.**

